

Gweryz neverz
 Var sujet eur melaer horrupl êruet en rad Montroulez,
 tost da Gastel-an-Taro, ar zul 17 eus a vis Eost,
 1845, deiz Pardon an Itron - Varia - a - Gallot.

(256, suite)

Var ton Gweryz Christ bras ar Vur.

Christenien mad eus a Vreiz, tostait da glêvet
 Recita eur goal valeur, diveza êruet.
 Va goad bars em goaziet a deu da arvêti
 O sonj hepgen en horrol ouz eur melaer qer cwi.

(257)

D'ar zul, seitec a vis Eost, dre ar c'haera amzer,
 Calz a dud divar ar mîz hac ivez eus a quær
 A yê en foul da Gallot d'asista d'ar Pardon,
 Erit pedi ar Verc'hez, hor Mam hac hor Itron.

Chapel enezen Gallot a zo, en Breiz - Izel,
 En veneration vras etouez an dud fidel.
 Deiz ar Pardon divea e zê d'eur foul vras,
 Ha dre zouar ha dre vôr, muioc'h eget biscoas.

Gabar cabiten Talbot, er c'hê a Montroulez,
 A recevas nombr a dud gant nebeut a eves.
 Var bord d'un antèr - cant den voa enni ambarget,
 Pa zisqennas ar rivier. souden, er rad eo èt.

An amzer a voa superb; ne rê banne avel;
 Ar môr a voa douf meurbet hac a dost hac a bell.
 Ne zônje en nep danger an dud a voa eno,
 Hac e c'hoantajont monet da Gastel-an-Taro.

Lingli eure ar gobar neuze var ar C'hastel;
 Mes el lec'h tostât outân en em dalc'he re bell.
 Eur vaguic fall, pehini na elle get conten
 Ouspen eun daou pe dri den, a receo deg souden.

(258)

Mar carje ar c'habiten bea laqet eves

Caout nebeutoc'h tud er vag, mont muioc'h alies,
Ne voa get da zepkori ar maleur êruet;
Mes michañ ne zônje get nemet er c'henta grêt.

An dour a antre er vag dre doullou voa enni:
En despet da guementse, n'en doe drouc nep hini:
Er c'hastel e'h êruas ar vagad genta-ze,
Hac e tistro d'ar gobar da vit tud adare.

Ar mantolod voa er vag, den imprudent meurbet,
A gri var tud ar gobar evel pur penn follet:
— Alôn... disgenit eta, hac antreit buan,
Ha n'am dalc'hit get geit-se d'ho tepordi amañ.

Gerqent eo leun ar vaguic... Mes, ô maleur! sivoas,
Ractal e zeo chaviret!... An disesper zo bras.
Ar c'hri fors, an disesper a zo etouez an oll,
O velet an dud faour-ze er môr ouz en em goll.

(259) Tri e vije ar galon eno ma na ranje,
O velet eur seurt arvest; an oll a spourone,
Treantet gant ar glac'har hac ar brassa horror,
O velet ar vagad tud er môr ouz en em goll.

Oll soudarded ar c'hastel, an danger pa veljont,
A ziredas calonec da zicour, prest ha pront.
Ar veterant côs Chicot er môr en em stlapas,
Hac entrezec ar vaguic gant courach a neuzas.

Ar serjant Moreau, diouc'h-tu, en eur vag antreet,
Gant Olier ha Priol, daou chasser a zo et-
Varzu an dud penseet, evit douguen sicour
D'an dud maleurus a voa treinet gant nerz an dour.

Etouez an dud penseet e zeus bet savet
Tri gant bagou, ha ractal [d'ar] c'hastel voent casset.
Eur bêrare, sicouret gant tud ar garnison,
Pere zo n'em cunduet evel tud a galon.

Ar serjant Moreau er vag, gant an daou chasser,
En deus savetet Castel, a voa en disesper;

Ha Borvo, an douanier, zo bet ive eürus
D'ellout savetat eun all eus an dud maleurus.

Eun den demeus ar gobar en deveus bet laget
Eur gorden endro d'e gorf, hac er mör n'em stlapet;
Mes re vër voa an amar, na ellas get tigout
An dud a gê da veuzi: n'ellas netra en tout.

(260)

Chicot, an den calonec, a ro c'hoas eur breuven
A gouraj eun den vaillant ouffet güelet bigen.
Ha ma n'en deus get ellet savetat den abet,
E voa eun dra impossibl da ellout bea grêt.

Mes, allas! ô va Doue! pëvar a zo beuzet!...
Eun den demeus ar Roudour, Mallegoll eo hanvet;
Guillon Gueguen hac e vrez, ha Stephan Martineau
Er fonz ar mör zo chommet... ôh! pebes fin garo!...

Regetomp digant Doue ma vezint prest cavet,
Erit rentä o c'horfou d'an douar beniquet;
Eno, peb mignon deze, prosternet d'an daoulun,
A imploro evite Jesus, hor Mestri Divin.

Martineau voa 'r mab hena eus a eiz crouadur,
Oajet eus a drivac'h vloas, den yaouanc, mad ha fur;
En voa souten e famill, esperanz e vam quëz:
ôh! mam baour quëz intanvez, c'houi zo dign a druez!

An deiz varlerc'h e scrifas Castel d'autrou Moreau,
Ar serjant qer courajus a Castel-an-Taro,
Eul lizer an touchanta eus e anafudequëz
Da vea er savetët ha rentët d'ar vuez.

(261)

Enor ra vezo rentët d'an oll dud a galon
Zo en Castel-an-Taro o terc'hel garnison!
En creiz ar maleur eürus hac an danger goassa
O deveus bet disquezet eur gouraj ar vassa.

Mar dê tud eus a gourach ar garnison vaillant,
Eo vrus dêze ive caout erit commandant
An Autrou Brun, alies bet en em exposet

Da zavetat tud a voa prest da vea beuzet.

Enor ive da Borvo, an douanier vaillant,
E galon a dle santout calz a gontantamant.
Kernilis, a Droudousten, atao a gonservo
Memor en fonç e galon d'an douanier Borvo.

Mes d'an dud eus ar gobar n'eller get rebeck re
An dinatur ar vrassa a zispeujont ene :
Necun anê d'ar C'hastel n'en deveus bet prizet
Da vont da c'houlou qêlou eus an dud savetêt.

Ah ! na pebes differanç en tud ar garnison !
Tud eus ar generussa hac a[r] vrassa calon ;
A boan e voe antreet an dud voe savetêt,
(262) Ma recevjont oll soignou roet gant tenerdet.

Peguen horribl voa gûelet Gueguen hac e bried
O veuzi o daou er mör ! o gûelet briatêt !!!
Stracal ~~ra~~ ra ar galon o sonjal ze hepken.
Comprenit en gementse, Bretonet christenien !

Tost da Gâstel-an-Taro, dilun e voe c'arvet
Corf an den eus ar Roudour, en eur stat trist meurbet ;
Dre soign ar c'hommandant Bruun da Lourdu voe casset,
Hac en kêred Sant-Martin d'ar meurs voe entêret.

Eus a fonç hor c'halonou lavaromp oll brema
Eun De profundis evit an dud maleürus-mâ
Ha regetomp ouz Doue ma zaint da repos
Goude eur fin qen eürus en gloar ar Bar[t]dos.

A. Lédan.

(Vol. VII, p. 256-262.)
strophes non numérotées.